



Kemennadenn Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg  
15/10/08

## **Patromoù nevez evit ar c'henstrivadegoù tuta kelennerien er skolioù, skolajoù ha liseoù : ar yezhoù rannvro o vont dek vloaz war-gil ?**

Ac'hann da viz pe nebeutoc'h e vo laket fin da batrom nevez ar genstrivadeg tuta kelennerien. Emañ o paouez bezañ kinniget gant François Perret, dean Ensellerezh Hollek an Deskadurezh Stad

Dianavet mik eo stummadur ar gelennerien divyezhek er patrom-mañ. Hag ankouaet e vefe bet dievezh, pe daoust hag-eñ e vefed bet e-soñj da reiñ ur friad d'ar c'helenn divyezhek ?

Tapet kaout e 2002 war-lerc'h ur stourm kalet e-pad muioc'h evit dek vloaz e oa bet krouet Kenstrivadeg Tuta Kelennerien ar Skolioù (KTKS) arbennik er yezhoù rannvro evit talañ ouzh an diouer a gelennerion diplomet en hentadoù divyezhek.

Dilemel an araokadenn vras-mañ e kelennadurezh ar brezhoneg a vo kaoz d'un taol-drouk bras ivez evit an tuta hag ar stummañ kelennerion en tri hentad divyezhek e Breizh (publik, kevredik ha kristen). Rak-se e vo laket bezoud ar c'helenn brezhonek en arvar bras.

Ret eo kreñvaat ar genstrivadeg arbennik dre wellaat e stumm da duta en ur ziorren rakstummañ er c'henstrivadegoù ha mont war ar vicher (stummadur dibaouez e brezhoneg ar gelennerion unyezhek...)

Ma ne rafe ket e torrfe an Deskadurezh Stad unan deus an tri dlead kentañ laket dezhi, da lâret eo ur "poell tuta diouzh ezhommoù an implijer".

### **Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg a c'houlenn :**

- na vo ket ankouaat ar c'helenn divyezhek ha ma vo laket ur Genstrivadeg Tuta Kelennerion ar Skolioù arbennik er yezhoù rannvro er patrom-mañ ar buanañ ar gwellañ, enni e vo div arnodenn diwar peder er yezh rannvro, da lâret eo e vo un arnodenn degemerablentez dre skrid hag un arnodenn degemer dre gomz er yezh rannvro ;

- ma vo digoret Testeni Gouested da Gelenn en Eil Derez (TGKED) daoubennek divyezhek er skolajoù hag el liseoù d'an holl zanvezioù (evit bremañ n'eo digor ken 'met d'an daou dalvoud brezhoneg-matematikoù, -saozneg, -istor/douaroniezh pe -lizhiri modern), rak-se e vo gwellaet an tuta kelennerion divyezhek er skolajoù hag er liseoù e pep danvez.